

YF_0139_Tinik Troc'h-Ialc'h

Selaouet eme ann hostiz
Unek heur son 'barz ann iliz
Poent eo, paotred mont en ho tro
Warc'hoaz 'dare ni 'n em gavo

'Vel-se lavaraz ann den-mañ
D'ann dilerc'herienn diveza,
En eur zerra demeuz ho fri
Dor ledan ann hostaleri

Ho meulet en devoa a walc'h
Keit me oa bet arc'hant 'n ho ialc'h,
Vit ho lakaat bremañ er mez
Mar ve red a doliou boutez.

Talvezout re dezhañ dale
Moned da gousket d'he vele
Hogen araok-se en deuz c'hoant
Da gounta he dammik arc'hant

Digerri ra ann archedou
Gant joa a frot he grabanou
O veza great eunn devez mad
Ha touzet aliez dañvad

Sel ama 'ta,eme Tinik
D'ann hostizez e goustadik
Sel pegement zo anezho
Great hon deuz devez mad c'hirio!

Ar gwin-ardant en deus redet
War ann daol-gount 'giz oa gleet
Ne oa mui banne ben bremañ
Nez meuz badezet anezhañ

Mad e teuz great, eme hou-ma
N'oud ket da zeski e peb tra
Te oar gwalc'ha ann dud vezo
En eur ober vad evit-ho

Hogen me oar ann daill ivez
Da drei d'ezho iod da grampoez
Ha d'ho derc'hel ebarz va zi
Ken deffont gwennek ebed mui

N'meuz ket va 'farez 'vit diskenn
Ann ampoezon en ho gwerenn
Ha pa 'n em lakan ven ket pell
'Vit rinsat d'ezho ho godel

Ha me, 'me ar paotr marchosi
Me oar labourat evel tri
Ha feiz din-me ne gollan ket
Va 'foan, va amzer, na va boued

Red ve va gwelet er marc'had
O testum ar *pratikou* mad,
Ho tenna war ho chupennou
Evit dont da bea banniou

- Ha me, eme Soazik ar Rouz

Plac'hik friant ha dibikouz,
Me oar digas paotret iaouank
D'ho ti kement 'vel m'effe c'hoant

N'meuz nemet mont war an treuzou
Da ober eun tammik neuziou
Ractal a teuont n'eur vandenn
D'am c'heul da dal ar varikenn

Gouzout a reomp me ann hostiz,
Penaos e zoc'h daou zen a briz;
Peuz nemet kenderc'hel bepred
Ni gresko deoc'h ho koumaned.

.....

Antronoz vintin, pa glevaz
E oa maro Jakez Tipoaz '
Tout euz he di gant re govad
Ann hostiz lavare timad

Doue d'ezhañ a bardonno
Eunn digoll vraz ebarz er vro
Peurlipet deuz kement eh doa
Araok monet euz ar bed-ma

Setu aze tud diaviz,
Pe stad ra ouzoc'h ann hostiz
Hag c'hoaz ra vad deoc'h mont d'he di
Gant hast da 'n em ampoezoni